

Barzonegou a bep seurt.

Bet embannet e 1929 e-barz **Mouez Kerne (Pierre Martin)**.

Modernnaet eo bet an doare-skriva.

Eur beleg e oa Pierre Martin, hag oberourien an darn-vrasa euz ar bazronegou a zo er skrid-mañ. Alese o mennoziou. En amzer-ze e oa ar vevelien mistri Vreiz-Izel, hag aon o-doa euz al lezenn nevez (1905).

Taolenn :

Guillom (Bonarz-Malgeneg 1797 – Kergrist Neulieg 1857)

Pedenn al labourer

F. Le May (Gwiskri 1852 – Sant-Inan-Klegereg 1916)

Rozenn ha leanez

Martin J. M. (?)

Mamm ar hloareg

Nihuellou (Gwiskri 1898 – Gwiskri 1925)

Gwechall

P. M. (Martin)

Ar bleiz hag an oanig

F. Le May (Gwiskri 1852 – Sant-Inan-Klegereg 1916)

Liliennig

Kannadig Skaer

Pedenn da Zantez Tereza

J. M. Martin (?)

Aotrou Kergoad

R. Bouédec (?)

Evid gouel eur mignon

P.M. (?)

An overn gentañ

Troet diwar Gwillom

Eurusted ar mêziou

P. M. (?)

Ar vran hag al louarn

F. Le May

Loeizaig Derw

Troet diwar labouriou F. Gouarin, (Sterwenn 1871 – Karnag 1932) **Person Gregam.**

Pedenn ar houër pe al labourer-douar

F. Le May

Fantig

P. M.

An nezadeg

Loeiz Kadou (?)

Dalhom d'ar brezoneg

P.M. (?)

Al labourer-douar hag e vugale

*

Kanaouennou brudet ar vro

Brizeug

Kanaouenn ar Vretoned

(Digeri **Taldir Jaffrennou**)

Bro-goz ma zadou

J. Le Maréchal

Kousk, Breiz-Izel

J. Le Bayon

Sav, Breiz-Izel

A. Brizeux

En enor da Batroned Skaer, Gwiskri ha Gourin

Sant Alan

Gervais

Sant Per

P. M.

Sant Herve.

Pierre Martin, beleg.(Gwiskri 1868 – Gourin 1935)

Furnez Breiz.

Pedenn al labourer

Doue, Krouer an Neñv, ar mor hag an douar,
Ho kalloud a zo braz, ho madelez hep par ;
Lakaad a rit an had da ziwan er parkou,
Diwall a rit an eost a garg ar grignolou.
C’hwi ‘zegas, pa garit, ar glao hag ar zehour ;
Neb a labour hebdoh a goll krenn e labour.
Hendoh netar ne gresk en-dro d’an douarou,
Rag ezu ho torn hepken e ta an oll madou.
Koulskoude, va Doue, evel m’ho-peus laret,
Ne zastumim netra ma ne labourom ket.
Evidi ma vezo mad, war ma labour dister,
Skuillet, o ! va Doue, ho nerz hag ho sklêrder.

(Troet diwar “Levr al labourer“ an Aotrou Guillom, person Kergrist).

Rozenn ha leanez

E liorz eur gouent e oa
Eur rozenn gaer dreist ar haerra :
He c'hwez vad hag he c'hoantiri
A rize¹ joa da bep hini.

Eul leanez peuz-yaouank c'hoaz,
Gwenn-lêz he zal, disliou he fas,
A chomas evel dudiet
Dirazi p'he-doa he gwelet.

« A ! rozennig, ken koant, ken gê,
Pe giz, emezi, en-deus Doue
Da lakaad amañ ken laouen,
Ha me trist 'vel c'hoar an anken ?

Eur mister eo 'r pez a welez, »
'Lar ar rozenn d'al leanez ;
Med 'n em gonfort : « me a hweñvo,
Ha te da viken a luho. »

F. Le May, person Sant-Inan, maro er bloavez 1916.

¹ rize : ? "ree".

Mamm ar hloareg

An noz a oa c'hoaz teñval pa zeuas euz ar gêr,
'Vid gweled he mab kloareg, ar vamm dous ha tener ;
Etrezeg Santez Anna, patronez Breiz-Izel,
E kerze leun a galon, - an hent 'oa hir ha pell, -

Eur paner pounner-meurbed 'zo e skourr ouz he breh,
Ha der ma kerz en hentchou, kreski a ra he beh ;
Euz Gwiskri da Gemperle, an hentchou 'zo kaled ;
Ne gaver neemd toullou ha mein gwenn hed-ha-hed.

Med kalon eur vamm gristen a zo kreñv ha nerzuz ;
Ar zoñj euz he mab karet he lak da vound euruz ;
E kêrig Santez Anna, kentiz ha 'm-oa degouet²,
Dirag ar Skeudenn zantel eo gwelt, daoulinet.

« Santez Anna, emezi, Santez Anna, Mamm vad,
Benniget va bugale ha benniget o zad ;
Gret ma vezin eun devez, e va hozni, laouen,
O weled va hloaregig lared an overenn.

J.M. Martin, beleg yaouank, maro e Gwiskri er bloavezh 1882.

² degouet : degouezet.

Gwechall

Tud fur an amzer goz, ne vijent ket spontet
Dirag diou leo d'ober 'vid an overenn-bred !
Ar wazed a wechall, gand o brageier lin
A ouie c'hoaz 'n em daol gand feiz war o daoulin.
Ar merhed a ouie, gand o hapou ken don,
O zavañcher gloan-rouz, mired en o halon
Ar vertuziou kristen... Pedom, va mignoned,
Ma vleunio 'vel gwechall ; en or parrez karet,
Ar feiz, ar garantez, oll ar madou hep par
Degaset gand or Mestr 'n eur zond war an douar,
'Vidom-ni, kendalhom, gand or skeudennou mein
Da chom evel holen e-mesk traou louz ha brein ;
Da voud d'an oll eur skwer 'vid o dougen d'ar mad,
Da bedi or Zalver ha d'e bedi dalhmad.

Loeiz Nihuellou, beleg yaouank, maro e Gwiskri er bloavez 1925.

Ar bleiz hag an oanig

An nerz eo lezenn al loened

Ar re wannañ a vez taget,

Eun oanig yaouank-flamm, 'vid torri e zehed,

'Zoube er wazig flour e friig minaoed.

Degouezet ar bleiz, evel eul laer,

Flak-flak e gov ha treud e ler.

« Penaoz, tamm marmouz fall, ho-pesu an hardisen

Da hlabousad an dour a hleb va garloñchenn ?

C'hwi a baeo, hag hebdale,

An torfed ho-peus greet aze. »

« Aotrou, eme an oan, distanet ho kounnar,

Izelloh 'm-eus evet, teir gwech vad hed ho karr. »

« C'hwi 'gred eta, oanig penn-skañv,

N'ouzon ket ar pezh a laran ?

Warlene, goud a ran, ho-peus va dispennet.

« Warlene, aotrou paour... n'on ket c'hoaz dizonet ! »

« C'hwi pe ho preur, ne verna ket ».

« N'em-eus na breur na c'hoar ebed ! »

« Unan bennag bepred 'n-eus roet din eur gwall vrud,

Rag n'em-eus peuh ebed gand ar chas hag an dud ;

Ha bremañ, evid va digoll,

C'hwi a baeo evdi an oll. »

Kentiz an oanig kêz gand ar bleiz dihelpet³,

Hap pebr hag hep holen, penn ha lost 'zo lonket.

P. M

³ dihelpet : marnaoniet.

Liliennig

Liliennig koant, laret din-me
Perag hoh-unan, da greiste',
Pa verv an heol 'uz d'ar parkou
Ken e stou penn ar bokedou ?

Perag ? laret din, o ! lilienn,
E weler ho kurunenn wenn
Savet ken plom e-bazr an êr
Daoust ma vez pouezuz an amzer ?

« Abaoe ar mintin, eul lomm gliz
A gousk, setu, e va haliz :
Gantañ em-eus freskadurez,
Hag emañ kreñv 'eneb ar wrez. »

« O ! plah yaouank, kaerrañ lilienn,
Mar deo ho tal glan ha seven,
Soñjet : kement-se 'zo dleet
D'ho kalon leun a zinamded. »

F. Le May

Pedenn da Zantez Tereza

Tereza, piou n'ho karfe o kleved ho mennoz :
« *Oh ober vad er bed-mañ tremen va baradoz.* »
Ni a houlenñ ho skoazell evidom hag or bro ;
Ar Vretoned hoh erbed, selaouit i d'o zro.

Goulennit bennoz Doue war on tiegeziou,
Ra vo miret e lezenn e kêr, war ar mêziou,
Ra vevo 'n oll briejou er garantez santel,
O c'hoarzin d'eun êl bihan kousket en e gavell.

Beillit war ho pugale ma vezint stard er feiz,
Roit deom skoliou kristen e Bro-Hall hag e Breiz ;
Deskadurez dizoue 'zo dizaour ha c'hwero ;
E-leh blenia d'ar vuhez ed stlej eeun d'ar maro.

Roit deom kalz beleien ha kalz seurezed
Da skigna lezenn Doue dre bevar horn ar bed,
D'an dud paour ha reuzeudig 'zo en deñvalijenn,
Ma paro war an douar d'an oll sklêrijenn/

Kannadig Skaer.

Notenn gand Embann an Hirwaz : anad eo e oa bet skrivet ar hantik-se gand eur beleg.

Aotrou Kergoad

Eun nozvez hañv, war ribl ar ster,
Job Kenderv-koz, ar pesketer,
A welas, e diskenn eur hoad,
Karroñs braz an aotrou Kergoad.

Pevar hinkane, flour ha gwenn
A stoleje ar harroñs melen,
Pep tu dezañ e lampe tan,
Tan war horre ha tan dindan.

Kenderv-koz, kaloneg-meurbed,
'Raog den, biskoaz, n'en-deus redet,
Deg gwech 'n-eus gwelet an Ankou
Ha Mamm-an-diaoul 'tastum louzou.

« Aotrou, emezañ, petra 'zo ?
Me 'zoñje din ez oah maro ?
Penaoz 'ta ho kwelan henoaz,
Serret 'vefe ar baradoz ? »

« Ar baradoz n'eo ket serret,
Med me, siwaz ! a zo daonet,
Abalamour d'am laeroñsi
Ha d'ar skwer fall roet e va zi. »

Ar homzou-ze, p'en-deus klevet,
Job Kenderv-koz a zo spontet :
« Tehit pell, en-deus lavaret,
Tehit pell diouzon, milliget !

N'am-eus klasket argant nag aour,
Gwell eo ganin chom bepred paour,
Gwell eo boud paour-kêz pesketer
'Vid boud rostet gand Lusifer. »

J.-M. Martin

Evid gouel eur mignon

Ma vefen-me an eostig-noz
A gan heb diskuiz, heb repoz,
Mignon kêz, pebez kanaouenn
Evid ho kouel a zavfen.

E-mesk traou kaerrañ an douar,
Ra vo hirio on mouez hep par,
'Vid lared deoh a wir galon :
Gouel mad ! gouel mad ! o ! va mignon.

'Vid ho fillor, o ! sant Patron,
Pedet Doue a-greiz-kalon,
'Vid ma vo bepred diwallet
Diouz peb droug ha diouz ar hleñved.

Laosket pell-amzer, va Doue,
E yhed hag e levene'
Eur mignon gand e vignoned,
Gand e vreudeur, eur breur karet.

R. Bouédec

An overn gentañ

« Laret din, mammig kêz, ‘vid petra ar hleier
A zon ar mintin-mañ ken flour ha ken seder ?
Hag hent ar presbital, perag ez eo ken brao ?
Ne weler hed-ha-hed ‘med bleun burulu ha skao ! »
« Va hrouadurig, hirio, gand ar brasañ dudi,
‘Vid eur beleg yaouank, ar helier ‘vrall o-zri.
‘Vid e orvern gentañ, ya hirio e sonant⁴
Evel m’o-doa sonet da zeiz e vadiziant.
Gwisket ‘vel eun êl, bremañ ‘vo gwelet
O tond dre an hent-se war-lerh e vignoned. »
« Bemdez, va mammig kêz, goulennom gand Doue
Ma welfeh ho krouadur oh overni en de’.

F. M.

⁴ sonant : sonont (evid ar rim)

Eurusted ar mêziou

Nag euruz e vevfe an dud diwar ar mêz
Ma soñjfent e Doue hag e vadelez.
Beva a reont er peuh ; pep tra gand plijadur,
Bemdez da bep hini a ra e vagadur ;
Hag en eur vuhez vad kaoud a reont, noz ha de',
Ar peuh 'vid ar galon gand eur wir levene'.
Pell diouz ar hêriou braz, diouz an trouz, ar savar,
Boud o-deus dour mammenn, frouez c'hwek, avel klouar ;
Gwez plantet a bep tu, digor-frank o deliou,
'Vid ober eun hunig e disheol o brankou.
Boud o-deus prajou glaz da vaga o loened,
Koajou stank d'ar gedon, lennou leun a besked,
Bugale a-vihan desket da labourad,
Da garoud o Doue, o bro, o mamm, o zad.

Troet diwar Gwillom.

Ar vran hag al louarn

Eun devez, Soaz ar Vran, war beg eur bod pintet,
A zalh en he geol eun tamm gwastell lardet ;
Alanig-al-Louarn, bepred e fri er-mêz,
A dap atao e lod kentiz ha ma klev c’hwez.
« Demad ! Itron ar Vran, greet em-eus tro ar bed,
Ha pluñv evel ho re biskoaz n’em-eus gwelet !
Ma ‘n-eus roet deoh Doue eur vouez euz ho liou,
Heb arvar c’hwi a zo rouanez or hoajou. »
War-lerh ar homzou-ze, teoad a ra kov Soaz,
Hag oll ar stank⁵ a gorn hag a zigor he beg braz.
An tamm gwastell lardet war an douar kouezet
Gand an hinkin louarn kentiz a zo lonket.
Evid diskouez d’ar Vran e oll anaoudegez,
Alanig ‘ra dezi eru gentel a furnez :
« Disprizet, moereb koz, ardou ar hoaperien,
Beva ‘reont diwar goust ar baour-kêz glepijen. »
Ar Vran douas neuze, eun tammig diwezd,
Na chomfe mui netra war he lerh da lipad !

P. M.

⁵ stank : stankenn, gwregel ; alese : he beg braz.

Loeizaig Derw

Notenn gand an embanner : Traduction littérale du “Convoi de Louise“ de Brizeux :
« Quand Louise mourut à sa quinzième année,
Fleur des bois par la pluie et le vent moisonnée. »

Loeizadig Derw, ha pa varvas,
N’he-doa ket nemed pemzeg vloaz ;
‘Wechou rozenn ouez vez abred
Gand avel ha glao diskaret.

‘N he labour pa guitas he lochenn,
D’he heul ne gerze nemeur den :
Paour ‘oa Loeiza, paour n’he de ket ken
Nemed enoriou ar baourien.

Tre ma yeze Loeiza d’ar vered,
Kloh sant Wenael ‘oa klevet
Lared eviti kenavo
Da dud ar harter tro-war-dro.

Gliz ar mintin, skourr ouz ar gwe’
Dindan an heol a lugerne,
Hag evel daelou hed-ha-hed
A goueze stank war an arched.

Pa adve ar beleg e gan,
Hag ar horistig e ziskan,
‘Kichenn o neiz, an evnigou
A lare o dousa soniou.

Loeizaig Derw, setu pe giz
E oes douget ‘tre d’an iliz ;
Kousk bremañ e deun ar vered,
Da ene ‘zo gand an êled.

F. Le May.

Pedenn ar houër pe al labourer-douar

O ! Doue gallouduz ha fur,
C'hwi 'vag ho pugale ;
Bemdez c'hwi 'ra o magadur
D'ar horv ha d'an ene.

Ar parkou a zo bet hadet
Gand ar brasañ evez ;
Hebdoh netra ne vo eostet
'Med c'hwezenn ha kernez.

Kaer en-deus ar paour-kêz kouër
Poania en e labour,
Ne wel en-dro dezañ 'med mizer,
Mar deuet ket d'e zikour.

Diwallet diouz ar gwall amzer
Or bloavez⁶ hag or gwez :
Strewet ar glao hag an tommder
War an tohad nevez.

Ha pa vo echu on devez,
Tremenet or buhez,
Roit dim diskuiz ha levenez :
En Neñv 'vo sul bemdez !

⁶ Or bloavez : an traou bet hadet hag a vo eostet er bloavez-mañ.

Fantig

An drask hag an eostig a gan hag a ziskan,
Leun eo ar prajeier a vokedou amañ,
Deuet eo an nevez-amzer da heul ar gwennilied,
C’hwi, Fantig, a ya kuit, diouz em-eus-me klevet.

Boemet ma’z oh pell ‘zo gand soñj ar hêriou braz,
Ne blij mui deoh ho loch toet gand banal glaz,
Savet zo⁷ en ho penn dilezel ho proiz
Evid mond da Naoned, marteze da Bariz.

Breiz a zo, larit-hu, eur vro a baourante’,
Bevañs he-deus alkent da rei d’he bugale ;
Gwell eo krampouez, yod kerh ; e ti ho mamm, ho tad ;
Eged n’eo bara gwenn ouz taol an divroad.

Baleit, mar karit, ‘tre d’ar penn all ar bed,
Bro par da Vreiz-Izel e neb leh ne gavfet,
Kaer eo dre he hoajou, kaer dre he gouriz-mor,
Mad na kaer eo dreist-oll dre he feiz, he enor.

F. Le May

⁷ Savet zo : tregerieg ; savet ez eus.

An nezadeg

Bemnoz, e-pad ar goañv, oll verhed ar hartell⁸,
Gand o hegeliad gloan, a zeu da di Katell,
Galloud a rit kredi n'eo ket mouez ar griled
'Zave an uhellañ tro-war-dro d'an oaled.

Da zibun marvailhou ha doareou ar vro,
Ne oa ket en o mesk par da Jann Beg-an-dro ;
Eun tres ken brao he-doa da zisplega he zraou
Ma chome ar genou digor-kaer d'he selaou.

Jann a gare Doue ha gizioù Breiz-Izel ;
Pep koñchenn ha peb gwerz, 'giz eur prezeg santel,
Lakae yaouank ha koz, oll ar re o hleve,
Da garoud muioh-mui o *Bro* hag o *Doue*.

P.M.

⁸ ar hartell : ar harter.

Dalhom d'ar brezoneg

Ar galleg marteze, a gredit-c'hwi, kerent,
A ro d'ar vugale spered ha gwir skiant ;
Galloud a rit koulskoude gweled aliez-mad
Ar graoz e-pad ar zun war chupenn ar Breizad.
Gouzoud a ra eur yez muioh 'vid ar re all ;
Evid eur paotr yaouank, an dar-ze n'eo ket fall.

Heb ar Vreiziz,kerent, mervela ar gwir Vreiz
Eur wech maro ar vro, setu mouget ar feiz ;
Setu ankounac'haet ar pedennou ken koz
Laret en tiegez da vinti ha da noz ;
Ha setu diskaret chapelioù ha kroazioù,
Savet gand on tadou gwechall war ar mêzioù.

Ha pa varvo ar feiz, 'varvo an tiegez,
Rag heb doujañs Doue n'eus ket gwir garantez :
An tad a yey d'e dro hag ar mab d'e hini,
'Raog pell amzer, siwaz ! 'vo ankenuz an ti.
Gand ar yez hag ar feiz e varv e peb Breton
An teñzor kaer laket gand Doue 'n e Galon.

Loeiz Kadou

Notenn gand Emban an Hirwaz : souezuz ar mennoziou-ze. Arabad cheñch an traou, ha mond war-raog.

Al labourer-douar hag e vugale

*Labouret ha kemeret poan,
Ar gwisk ne spleit ket d'an dindan.*

Eul labourer-douar, 'raog mond dirag Doue,
A halvas en-dro dezañ e diad bugale.
« Diwallet, emezañ, da werza ar parkou
Glebiet ken aliez gand c'hwezenn ho tadou.
Na zoujet ket ho poan, teuriallet⁹ ho touar ;
Gand ar bal, ar bigell, torret peb lodenn-varr ;
Diframmet ar grouiad¹⁰ hag ar vein heb damant,
Dindanne, me 'lar deoh, 'zo eur huzad argant. »

War-lerh maro o zad, ar vugale, c'hwez beo,
Euz peb moutadenn zeh ra eun tamm douar neo¹¹,
Ha, da zilost an hañv, eur burzud 'oa gwelet,
Ar zegal hag ar herh 'oa bet gante eostet.

« Hag an teñzor kuzet ?

Diberhenn eo bepred ! »

An tad en-doa diskouezet 'oa eun den a skiant.
Pa'z eo gwir al labour 'zo eur huzad argant.

P. M.

⁹ teuriallet : turiet.

¹⁰ ar grouiad : ar gwriennou.

¹¹ neo : **notenn gand an embanner** : *neo*, contraction de *nevez*.

Kanaouennou brudet ar vro

Kanaouenn ar Vretoned

Diskan
*Ni 'zo bepred
Bretoned,
Bretoned, tud kaled*

O ya ! er brezel, paotre taer,
Paotred vad ha seven er gêr.

Tehed a ra ar Zaoz krenn-ha-krenn,
Pa lavarom-ni "Torr e benn !"

Hogen, klevit en eureujou
Kanaouenn skiltr ar biniou.

O ! Breiz-Izel, o ! kaerra bro !
Koad en he hreiz, mor en he zro !

Allaz ! ma tlean Breiz kuitaad,
Me 'ouelo leiz ma daoulagad.

Mirit, breudeur gêz, ho penn-baz,
Ho pleo hir hag ho pragou-braz.

Gourennit mad ! Eur gourenner
En-deus kalon ar merhed kaer.

Me a droho ma zeod em beg
Kent dizeski ar brezoneg.

Karantez dit, bro garadeg,
Breiz-Arorig, douar derveg¹².

Koulskoude dreist an oll vadou,
Karom ar Hrist, Doue on tadou.

A Brizeux.

¹² derveg : gand dero e-leiz.

Bro-goz ma zadou

(Digeri Taldir Jaffrennou)

Kousk, Breiz-Izel

Diskan
Kousk, kousk,
Breiz-Izel, bro dispar,
Setu an noz o tond war an douar,
Kousk
Breiz-Izel, bro ken mad,
Trouz ar mor don a zav d'az luskellad.

An heol a zo kuzet, setu echu an de',
Me 'glev ar hloh o tiñsal an *Ave*.

C'hwez vad an ed e bleuñ hag al lann alaouret
War ar mêziou gand ar gliz-noz a red.

Ar vesaerien a gan o tastum o loened ;
Gwerziou Breiz-Izel n'int ket c'hoaz kollet :

En traoniennou didrouz, me 'gleb kan an estig¹³,
Telenner-noz, kanit flour ha dousig.

'Uz da Vreiz o skedi an neñv steredennet
A lar 'zo eun Doue ouz or hared.

An neb a hwez bemdez a hounid e repoz ;
D'an dud vad Doue en-deus greet an noz.

Arvor, o ! douar sakr, a-grezi-kalon m'ho kar,
Bro all ken kaer n'eus ket war an douar.

J. Le Maréchal

¹³ estig : eostig.

Sav, Breiz-Izel

Diskan
Sav, sav,
Breiz-Izel, bro hep par,
An heol a daol splannder war an douar.
Sav !
Rag me 'glev kan lirzin
Al lapoused, dihun oll en-dro din.

Setu echu an noz, splannaad a ra an de',
Ar hloh a dint c'hoaz eur wech an *Ave*.

Ar voualh er bod-spern a hwitell d'ar mintin,
Bugale Vreiz a gouez war an daoulin.

Ar gliz en-deus skuillet perlez dre an douar ;
An heol o hutuillo diouz beg ar barr.

Ar segal er parkou 'raog pell a vo melen,
Ne vanko ket c'hoaz bara da vab-den.

Arvor, douar karet, mirit ho pugale,
Nerz 'vid an deiz o-do digand Doue.

Arvor, douar santel, a-greiz-kalon m'ho kar ;
N'eus bro ebed ken kaer war an douar.

J. Le Bayon

En enor da Batroned Skaer, Gwiskri ha Gourin

Sant Alan

War don : *Santez Mari.*

Diskan

*O ! sant Alan, sant bro Skaer, steredenn Vreiz-Izel,
Levenez an êlez kaer dindan o diouaskell,
Euz ho kador alaouret ha savet dreist al loar,
Roit eur zell karantezuz deom war an douar.*

Allaz ! ni a zo tud paour, tud paour diwar ar mêz !
Koulskoude d'ho ti santel e teuom aliez ;
Ya ! dre ar falla hentchou, hañv-goañv e teuom oll,
Skornet bep sul gand an erh, pe devet gand an heol.

Eun divenner a glaskom : kaled eo or buhez,
Warnom al labour atao, atao ar baourentez ;
Bemdez kalon an douar a doullom gand houarn,
Re all a zebr ar gwiniz hadet gand on daouarn.

Hogen, sellom uheloh ! Eur bed all a vezo,
Pep unan diouz e ober neuze en-devezo :
Fall labourer an hini a gav e veh re vraz,
Ha fall gristen an hini na oar dougen e groaz.

Evel bugaligou kêz bodet en-dro d'o zad,
Setu ni oll daoulinet en-dro deoh, o ! sant mad ;
Kalz ahanom er vro-mañ, kalz a zoug hoh ano,
Er bed-mañ hag er bed all, bezit ganeom atao.

Da gonforti ar Vretoned
Ar bedenn-mañ am-eus savet..

A. Brizeux.
Skaer, e miz Eost 1843.

Sant Per

Diskan

*Gloar, enor ha karantez
Da zant Per or Patron !
Bremañ hag hed or buhez
Ra vo mestr or halon !*

Setu an devez kaerra
Evid oll ar barrez ;
Gwiskriviz, kanet eta
Gand laouenidigez.

Sant Per, choazet gand Doue
Kenta mestr an Iliz
A zo bet roet deoh ive'
'Vid Patron, Gwiskriviz.

Ne oa 'med eur pesketer,
Ar paourrañ euz an oll,
Pa zegouezas ar Zalver
D'e choaz 'vid Abostol.

E rouejou a guitaas
Evid heulia Jezuz,
Ha d'e Vestr mad e touas
Eur garantez paduz.

Med, o ! na skwer trist-meurbed
Euz or sempladurez !
Jezuz gand Per 'zo nahet
Dre aon 'raog eur vatez.

Evel or Patron ive',
Goude m'or-be touet
Beza fidel da Zoue,
Ped gwech om bet kouezet ?

Sant Per, buan en-deus greet
Eur binijenn hwero,
Ha ni, e-kreiz ar pehed,
E fell dim chom atao.

Evid eur pehed hepken
Eñ 'oa oll glaharet,
Ha ni vez gwelet laouen,
Siwaz, gand mil pehed !

A ! distroom ouz Doue.
Skuillom, skuillom daelou,

Ma vo gwalhet on ene
Euz fank on pehejou.

Goude gouela, hirvoudi,
Gream c'hoaz evel sant Per :
Rentom eur gwir testeni
E karom or Zalver.

Testeni ar garante'
A vez roet dre gomzou,
Mez roet e ve ouspenn-ze
Gwell c'hoaz dre oberou.

A ! gand pebez feiz nerzuz
Ra Priñs an Ebestel
Anavoud Ano Jezuz
Hag e lezenn zantel !

Gand pebez nerz e tiwall,
Skwer an oll bastored,
Na yefe d'ar peuraj¹⁴ fall
Nikun euz e zeñved.

Heb aon 'raog ar Juzevien
Hag an Impalaered,
E toug ar wir sklêrijenn
Peb leh ma'z eo dleet.

Antioch ha Bro-Jude
A gelvas e gomzou ;
Kêr Rom a welas goude
Termen e labouriou.

Diazet eno e dro,
A Dad ar gristenien,
Dre urz an tiran Neron
'Erruas e dremen.

Goude beza gouzañvet
Ar hrisa tourmañchou,
E ene santel-meurbed
A zavas d'an neñvou.

Alhweziou al leh kaer-ze
E sant Per 'zo fiziet :
Eñ 'zo euz Palez Doue,
Ar porzer lesanvet.

N'ankouezom ket, Gwiskriviz,

¹⁴ peuraj :peurvan.

Ar pezh en-doa laret :
Neb na glev ouz an Iliz
Ne vo biken salvet.

Ouz ar Pab, vikel Jezuz,
A zalh kador sant Per,
Ra vezim eta sentuz
Atao, e peb amzer.

Neuze or Patron karet,
Gand brasañ karante'
E-bazr Palez an Drinded
Or hemero eun de.

Greet gand an aotrou Gervais, kure Gwiskri (1857).
Hentet ha renket goude-ze gand beleien ar vro.

Sant Herve

Ton : *Kelven*.

Diskan

*O ! sant Herve benniget, selaouet or pedenn,
Taolet eur zell a druez war ho pardonerien ;
Miret en o halonou ar hredennou santel,
Ar fezi ho-peus prezeget gwechall e Breiz-Izel.*

E dad, anvet Hervian hag e vamm Rivanon,
'Oa tud a zoujañs Doue, kristenien a galon ;
Ar henta komz 'doa desket d'o hrouadurig karet
'Oa Ano dous ha tener ar Zalver benniget.

N'o-doa nemed disprizañs 'vid ar bed savaruz ;
Ne glaskent 'med eun enor, gwir garantez Jezuz ;
Savet er skol ken santel gand e dad hag e vamm,
Herve, evel eun êlig, 'gerze fur ha divlamm.

Ne oa ket ouspenn seiz vloaz pa zave gwerzennou
Ken kaer war an eurusted a gaver en Neñvou,
Ma sante ar beherien o halon o tridal
Pa glevent mouez Herveig, anvet ar "*Barzig-dall*"

Pa veve on tud kenta e Barrouz-an-douar,
Ouz o mouez an oll loened a oa sentuz dispar ;
Evid gounid on Tadou, Doue a roas ive'
Ar memez galloud gwechall da gomzou sant Herve.

E vurzudou estlammuz, anavet tro-war-dro,
A halve d'e vanati tud euz pevar horn ar vro,
E aliou, e furnez, a zeske d'on Tadou
Beza santel hag euruz 'n eur greski o madou.

E-mesk an oll ilizou savet e Breiz-Izel
'Vid enori ar zent koz ha goulenn o skoazell,
En Argoad hag en Arvor, ne gaver ket unan
Kaerroh 'vid ar chapelig savet 'kichenn *Roh-Vran*.

Dour e feunteun 'zo brudet en-deus galloud meurbed
Da bellaad diouz ar hezeg peb droug ha pep kleñved ;
Rag-se, da zeiz e Bardon, euz pep korn euz ar vro,
Gand kezeg a-vandennou eur bobl tud 'da¹⁵ eno.

Evel gwechall on Tadou, ni 'fell dim kenderhel
D'ho enori, Sant Herve, ha da zond d'ho chapel ;
Dirag ho *Releg santel* setu-ni daoulinet,
Benniget parrez Gourin, o ! Patron ken karet !

¹⁵ da : deu.

Notenn gand an embanner : On attribue à Saint Hervé le gracieux cantique du “Paradis“, si populaire en Bretagne :

Jezuz, pegen braz e',
Eurusted an ene,
Pa vev e gras Doue
Hag en e garante'.

Gourin ; 10 Gwengolo 1925.

Furnez Breiz

Bet dastumet gand **Pierre Martin** (Gwiskri 1868 – Gourin 1935)

Pa vez sehor 'houlenner glao,
Eun dra bennag a vank atao.

Glao da houlou deiz
Ne zalh ket beteg kreisteiz.

Reo-gwenn war loar nevez
A denn da hlao aliez.

Reo-gwenn war ar hresk,
Amzer gaer ha fresk.

Reo-gwenn en diskar
Amzer hleb heb mar.

Ruban-hlao da doullig-an-noz,
Avel pe glao 'benn antronoz.

Brumenn en oabl, da greisteiz,
Glao a-raog tri deiz.

Ruzadur d'abardaez-noz,
Amzer vrao antronoz.

An heol gwenn
Da hlao a denn.

Avel e bez Judaz,
E-pad an deiz glao braz.
(*Avel e bez Judaz : avel euz ar biz*).

Loar gand eur hleh d'an noz,
Avel pe glao 'benn antronoz.

Mad eo hada an douar
War an diskar euz al loar.

Melchon hadet diouz al loar neo,
A lako al loened da greo.
(*neo : nevez ; da greo ; da greñvo*).

An neb a skarz e graou da genver
A gollo eur vuoh pe eun ounner.

Kerh hadet da genver,
Kerh da garga ar zuler.
(*ar zuler : ar solier*).

Glao da houel sant Geltaz,
Glao e-pad ar bloaz.

Kenverig a lavar
A zo ui gand ar yar.
(*Kenver : miz genver + ig ; a zo ui, ez eus vi*).

Da viz feor, re a hlao bemde',
Re nebeud beb eil de'.
(*feor : miz c'hwevrer*).

Da ouel Matias,
E ya ar bik da glask he flas.

Eet ar goukoug da Bariz,
Da ruillal e yaouankiz.

Pa deuy ar goukoug d'ar gêr
'Teuy ganti an neo-amzer.
(*neo amzer : nevez amzer*).

Miz meurz gand e vorzolou
'Zo ken gwaz hag an Ankou.

Da ouel sant Minole
Stanket ho prad ouz ho kole.
(*Da ouel sant Minole : d'ar 4 a viz Meurz*).

Da ouel Paol,
Mern-vihan war an daol.
(*Da ouel Paol : d'ar 15 a viz Meurz*).

E miz Meurz, a-benn kuz-heol,
E tle ar goan boud war an daol.

D'ar zul-bleuniou
E ta an naered euz ar hleuniou.

E-pad ar zun zantel,
Amzer goloet hag avel.

D'ar zul-bleuniou, kontet hoh uiou,
Da zul Fask, torret o fennou ;
Da zul ar Hazimodo, torret ho koz podou.
(*kontet : kontit ; torret : torrit*)

El leh ma vez an avel da zul al lora,
Eno e chomo a-pad tri-hard ar bla.
(*al lora : al lore : sul ar Bleuniou ; ar bla : ar bloaz*).

Da ouel sant Mark
E sav an dohadenn er park.
(*Da ouel sant Mark : d'ar 25 a viz Ebrel*).

Pa vez glao da ouel sant Mark,
E kouez ar hignez war ar park.

E miz Mae, glao bemdez 'zo re,
Ha re nebeud da beb eil de'.

Glao miz Mae
'Bad eiz de'.

Pa weler eun aval da Ouel Yann
Da Ouel-Mikêl e kaver kant.

Pa gan ar goukoug war-lerh Gouel Yann
'Vz pell an ed war e zramm.

Pa vez glao da ouel Madalen,
E vrein ar hraoñ hag ar hesten.
(*ar hesten : ar histin*).

Miz Eost, teir gwech ar bloaz,
Gouel Mikêl beb eiz vloaz !

Laourañsig, flastrer moh,
Tan pe distan a faot deoh ?
(*Rag ano an den + ig*)

Gouel Mikêl hag an Ankou
A lak kalz a chañchamantchou !

Da ouel sant Jili,
Daou zevez labour d'ober tri.

Da foar Lukaz,
An eost er hrignol hag eñ braz.

Da viz Hero,
Teilet ha c'hwi ho-pezo.
(*Hero : Here*).

Erh d'an Nedeleg
A dalv teil 'vid an ed.

A-barz ma vezo fin ar bed,
Fallañ douar, gwellañ ed.

N'eus ket a fall vicher
D'an neb a oar heh ober.

Paneved ar gemenerien
'Ve eet an dud gand ar helien.

Diouz e labour
'Vez anavet ar micherour.

An neb a glask taped ar had
Eo red dezañ sevel mintin-mad.

An hini na dorch ket e bal
'Vo red dezañ torcha e dal.

Karoud an oll ha labourad
A lak eurusted e pep stad.

Skubet ho ti, grit ho kwele,
Den ne welo ho paourente'.

Laerez an amzer hag ar boued,
Brasañ pehejou 'zo er bed.

Al labour 'vez bepred displeet
Pa vez paeet 'raog ma vez greet.

Al labour hag ar bedenn
War an hent mad a zalh peb den.

Peb loudourenn
A gav mad he heusteurenn.

El leh ma vank nêadurez
Ne chom ket beo ar garantez.

Kenat poent a baourentez,
Lakaad an dillad-zul d'ar pemdez.

Gwaz mezhvier ha gwreg latouz
'Gouska abred war ar plouz.
(*latouz : a blij dezi lipad*)

Bevin, kig leue ha kig maout,
'Zo mad d'ar re a hell o haoud.

Diwezd eo deoh armerz
Pa vez an tamm diwezañ e gwerz !

Na daolit ket ho potou a-gostez

Kent n'ho-po kavet eur re nevez.

Doue en-deus laret d'ar paour,
Ma n'ho-peus jistr, evet dour.

An neb a vev gand bara zeh
A gav da beuri e peb leh.

Boud zo tud ha n'o-deus 'n o zi
Nemed kreun bara da zebri,
Hag a hop e ti ar re all
Ma n'o-deus rost e-leh kig sall.

Ar madou a ya hag a ya
Evel moged, evel pep tra.

Dibaot den a binvidika
Oh ober gaou ouz e nesa.

Friko d'ar zul, friko d'al lun,
Ha bara zeh e-pad ar zun.

Neb 'zo re vignon d'ar gwin mad
'Zo enebour da vab e dad.

Ar madou deut dre an hent fall
A zo diêz-braz da ziwall.

Ar madou braz, an enoriou,
Euz ar zent a ra diaoulou.

Madaou braz a zo mad
Pa ouier ganet ober vad.

Matez nevez, pa zegouezo,
Kement ha teir a labourou.

Plah a gar heh enor mired
Ne zarempred ket ar pianoied.

(ar pianoied : pianoiou ardivinkel, hervez an droidigez e galleg : marteze : ar biancoied : ar re a ra gand eur piano ?)

Gwelloh eo kozni enoret
Evid yaouankiz fall-vrudet.

E ya Fañchon da fest an noz,
Toull he loerou ha fall he broz.

C'hoant dimezi ha beva pell
O-deus peb Yann ha pep Katell.

Ne deo ket deut c'hoaz ar mod
E ya ar plah da glask ar paotr.

An hini a gemer e bar
A zimez a-benn pa gar.

N'eus ket a fall votez
Ha ne gav ket he farez.

Bezit du, bezit gwenn,
Peb gaor a blij dezi he menn.

Hag e veh ken du ha mouar,
Gwenn-kann oh d'an hini ho kar.

'Tre an dimez hag an eured
E vez an diaoul o redeg.

Dibaot ar bardonerien vraz
A zistro sent d'ar gêr, siwaz !

Eur plah anavet en dañsou,
Eur jao anavet er foariou,
A chomo hep kaoud zao o-daou.

(kaoud zao : ar plah ne gavo den da zimezi ganti ; ar jao ne gavo den evid prena anezañ).

Eur plah yaouank ha pa zimez
Ne wel 'med aour e beg ar gwez,
Ne vez 'med deil melen enne.

E-tal ar forn, hag ar steriou,
E vez klevet an doareou.

Chann ne oar penn ebed d'ar zun
Ma n'eo ket e Gourin d'al lun.

Laosket an dud da glabousad
Ha grit bepred ar pezh 'zo mad.

Pep unan 'n-esu e zi,
Euruz ma n'en-deus tri.

Evid plijoud d'an oll
Eo red boud fur ha foll.

N'eo ket an tohad pounnerrañ
A zav o fenn an uhellañ.

An ibil fallañ

A hwitell ar hentañ.

Gouzañv an dud hag an amzer
A zo daou dra red da ober.

Gwell eo brud vad leun an dorn
Evid madou leun ar forn.

Mad-tre eo beva pell,
Beva mad a zo kalz gwell.

Ar prener a damall ar pez a gav ar gwella,
Hag ar gwerzer a veul ar pez ne dalv netra ;
An eil hag egile, 'vid gounid eun diner,
A laro meur a haou a-raog distrei d'ar gêr.

Eul liñser wenn ha pemp plankenn,
Eun dorchenn blouz dindan ho penn ;
Pemp troatad douar war horre,
Setu madou an den er be'.